

Différent du n° 10049

6

# Soune ar Mamou Kaer

1

Er mis a zo oun dimezet  
A me a zo deja inouet  
Selaouit mad ar vrionez  
Ag e klevoch toute va buez

2

Va maouvouez zo er plac'hic koant  
Ganti ne meus ket a boan  
Heurus vigen chelit kredi  
Ma migé ken bét nemetie

3

E mame a zo ganti er gear  
Ag e chouzohe ar mamou kaer  
Nin mad nemet da lakat trous  
Kar kals aneo en deus teoudou lous

4

Pa ziunan dious ar mintine  
E teu dastu da lavaret dine  
Sao ta buan a gra kafé  
Da zigas digne e va guele

5

Araoc va maouvouez vez servichet  
Anes me a viche drebet  
Pligout ra digne pe ne ra ket  
Me ranque mond kuit eb tame ebet

6

Pa dean dar gear evit dribi  
Neuhé e klevant anic'hi  
Atao o iou'chal pe o voela  
Ne hoar ket memez vit petra

7

Pa vez ar souben servichet  
Ar vame gaer a vez guelet  
Gant e daouarn a patouliat  
Ag o klasque toute an tamou mad

8

Neuhé pa vezonte tout klasquet  
Ar plat dimé a vez passet  
Me zo ergear evel ar chi  
An ascourn a ranquant da zribi

9

Selaouit mad paotret youanque  
Neo ket brao kaout er vavouez koant  
Dirac ar mear livirit nan  
Kentoch evid beva gand e mame

Reproduction interdite.

Benoit

